




Torgennou glas Kastellin.

PHOTO JOS LE DOARÉ

Bleun-Brug

Niv. 64 (Mensuel)

Abonnement : 500 Francs

HERE 1953

En han'Doue paeit ho koumanant 1953 !

Arabat gortoz na ve kaset d'eoc'h eur paper arc'hant.

An darn vrasa eus hon lennerien a zo echu o c'houmanant. O fed start a reomp eta da baea o c'houmanant nevez raktal, pe da lavaret d'eomp ne gemerint mui ar gelaouenn.

Koumanant bloaz	500 lur.
Koumanant a enor	600 lur.
Madoberour	1.000 lur.

Kas an arc'hant da : **V. SÊITÉ, Bleun-Brug, Ty-Carré, Châteauin, C.C.P. 544-22 Nantes** — hag ar skridou da : **M. l'abbé BLEUNVEN, Curé de Saint-Renan (Finistère).**

Eun dizonestiz eo reseo ar goulouenn e-pad eur bloaz ha nac'h goude he faea.

TAOLENN

Ober mat sin ar groaz	1
Kenteliou d'an dud yaouank	2
Al labour-douar e Breiz	4
Abati Bodgwen	5
Distro laouen relegou santel	6
Brezonég yac'h	7
Eostig Leon	8
Bokedig Tro 'n Heol	9
Unan, gwall dapet	10
C'hoarzomp	11
Ar bedenn evit ar vro	12
Ar Bibl e brezonég	12
Ma c'hornad douar	13
Buhez ar Bleun-Brug	14
Eul lizer frealzus	14
Kontadenn a vro Portugal	15
Keleier	16
Kamp ar vrezonegerien	17
Pedenn al labourer	18

Ober mat hor sin a groaz



GOUEL ar Groaz, hon eus lidet da hanter miz Gwengolo, a ro tro da bleustri war an doare ma reomp sin ar groaz.

Sin ar groaz eo ar merk kenta, bet lakaet warnomp, gant Hor Mamm Santel an Iliz. Hen a vezo ive ar merk diweza a raio ar beleg, war hor c'horf maro, araok ma vezo diskennet e douar benniget ar vered.

Bez ez eo ar jestr hag ar bedenn genta, bet desket d'eomp, ez-vihannik, gant hor mammou kristen ha breizat.

Tra disterik da welet, sin ar groaz a zo bras kenañ da c'houzout, pegwir e talvez d'eomp da ziskleria hor feiz, da ziskouez war betra eo harpet hor buhez, da denna bennoz Doue warnomp ha war ar pezh a reomp.

E pajennoù kenta ar c'hatekiz, hor bugaligoù a zesk penaos hen ober mat, peseurt galloud en deus, ha peur eo dereat ha talvoudus d'eomp hen ober. Kentel gatekiz ha ne rafe ket a zroug d'eomp-ni, tud vras, ad-zeski ive hon unan.

E buhez ar breizad hag a deu e zaoulagad da bara ken alies war skeudenn ar groaz, e tlefe beza sanket doun ar pleg da ober sin ar groaz.

Ar c'hiz vat ha santel d'hen ober alies a zo deuet d'eomp, a rumm da rumm, digant ar zent koz, o deus hadet ar feiz en hor Breiz.

Ar beleg a goumans hag a echu an oferenn en ano an Tad hag ar Mab hag ar Spered Santel, ni ive digoromp ha klozomp hon dervez en eur ober sin ar groaz.

Lakomp ar merk santel-se war hon tal ha war hor c'halon en eur staga gant al labour, en eur vont en hent, araok ha goude ar predou, p'emaomp e riskl da gaout eun droug bennak...

Sin ar groaz a'zo hag a jomo bepred arm ar c'hristen. Ennañ eo e kaver nerz da jom leal d'an dever ha da drec'hi ardou an Droug Spered.

Va breur, ha va c'hoar ger, ha fellout a ra d'it beza den a galon ha den a zever, ha nann eur c'hrener hag eur gorzennig, gra warnout alies sin ar groaz ha gra anezañ mat. Gant da zourn, ya, met ive gant da galon.

Ha n'eo ket eun druez gwelout awechou kristenien vat, war o meno, oc'h ober sin ar groaz, ken divergant ! Hen eo hor merk brasa a c'hloar hag a enor, hor merk sura a silvidigez, hor banniel.

Eur Breizad hag a deufe da ruzia ha da gaout mez oc'h ober sin ar groaz ne vefe ket eur gwir Vreizad met kentoc'h eun trubard.

L. B.

Kenteliou d'an dud yaouank

Kleñvejou da ziwall outo : An naplez.

An naplez (1) a zo, a drugare Doue, rouez awalc'h war hor maeziou e Breiz. Stank eo er c'hériou. Eur gwall glénved eo. Ha n'eo ket abalamour e teuer bremañ abenn d'e barea goude hir amzer, gwall hoan ha dispignou, eo diriskl e baka. Diwallit da vont di da eva, da zafsal ; dreist-holl, paotred yaouank, diwallit ouz merc'hed kêr, re a vicher fall hag a ouezer peseurt micher eo, re all gwasoc'h c'hoaz hag a ra an hevelep micher dre guz. Eur pok, an eva en eur werenn kailharet gant eun naplezenn a zo awalc'h evit stlabeza ho kwad evit atao. Gant ar vez da veza bet tapet gant ar c'hleñved e chomoc'h hep klask da vat e barea hag e timezoc'h. Ober a reoc'h eun torfed a eneb ho pried hag eneb ho pugale, ma'n em gavit da lakaat ho pugale da vont da zav. Ma n'eo ket an naplez a bakfec'h, an *troaza-bero* (2) eo a ve hag a zo ken gwaz all evidoc'h hag evit ar re all. Chomit eta war ar maez ; c'hoariit c'hoariou a-wel d'an holl.

M'ho peus karantez da rei hag e vez pa vezer yaouank, roit-hi d'eur plac'h yaouank eus ho ouenn, eus ho micher, eus ho stad, eus ho pro ; eur garantez c'hlan evel just. N'eus den hag rebeche kement-se d'oc'h. Ar garantez n'eo ket eun dra da werza na da brena eo.

Ma'z eo rouez an naplez, re stank an holl eo an *tuberkuloz* en hor bro, allas ! Ma n'oc'h ket eus ar ouenn-se gwella-se, fiziout a c'hellit muioc'h eget re all n'ho pezo ket ar c'hleñved. Ha koulskoude ma n'ho peus ket kemeret soursi gant ho yec'hed en ho yaouankiz, m'ho peus skuizet ho korf dreist muzul er c'hoariou onest pe gwasoc'h c'hoaz, er plijaduriou difennet, ho kwad a vezo e stad d'e baka. Ar vuhez a zo eur chadenn, n'hen ankounac'hait ket. Diwar daou zen yac'h, rouez eo ne vefe ket a vugale yac'h. Ha diwar eun tuberkuleuz hag eun den yac'h ? Den ne oar. Eur chañs war ziou avat eo da gaout bugale klañvidik. Daou duberkuleuz hag a zimez asambles a vefe gwelloc'h d'ezo chom paotr ha plac'h yaouank, abalamour da eürusted pep hini, abalamour, d'ar vro, rak ne ray ar vugale, nemet kreski niver ar re glañv hag hada ar c'hleñved endro d'ezo, ober droug eta d'ar ouenn. Setu dimeziou hag rankfe beza difennet. Ar gwas a zo eo n'eus ket troetoc'h da zimezi eget an tuberkuleuz. Tomm eo o gwazied gant ar c'hleñved. Ha pa 'z int dimezet ez eo heñvel, e c'hellit kredi, hag e teu d'ezo dre-se kalz bugale.

Evez eta yaouankizou ! Evez bras. Sellit mat ouz ouenn ar familhou a c'hoantait mont enno da vab kaer pe da verc'h kaer. An dud a gav d'ezo n'eus a duberkuloz nemet gant ar re o deus paz hag a groz ; gant ar re, eta, klañv gant an droug skevent. Allas ! ar c'hleñved-se a grog ive er mellou, en eskern, en empenn, er c'broc'hen ha kement-zo. N'eus korn ebet eus eur c'horf ha ne c'hellfe ket beza taget. Eus gwad ar vamm, eus gwad an tad ez a da wad ar vugale. N'eus bugale yac'h nemet diwar gwad yac'h.

Gouzout a reer ivez ez eus muioc'h a duberkuled etouez an dud paour bevet dister, o loja e tiez teñval ha lous, ouspenn, alies. Seul stankoc'h a vez an dud en eun ti bihan, teñval, leiz ; seul stankaat ha gwasaat a ra ar c'hleñved. Ar baourentez hag an dienez 'zo douar mat d'ezañ da c'henel, da zarevi ha d'en em astenn eus an eil d'egile. Kaout eun ti yac'hüs, sklaer, leun a aer vat, aes da domma pa vez re yen, da glouaraat da freskaat pa vez re dom ; kaout boued nerzus, beva en eun doare yac'hüs ; setu hag a vir da baka ar c'hoz kleñved-se ; setu penaos enebi outañ pa gouezer klañv ha beza er stad gwella da grefivaat warlerc'h beza bet klañv.

Ar binvidigez eo eta ar remed ? Unan eus ar remejou da vihana. Ha setu perak, daoust d'ar remejou implijet evit miret ouz an tuberkuloz da skuba

(1) E galleg : « syphilis ». Kleñved hag a baker diwar an hudurnez ; e baka c'heller a-hend-all o veza m'eo spegus.

(2) « Blennorrhagie », kleñved lous all.

millionou a dud bep bloaz, eo ret da genta sevel tiez yac'hüs, rei lojamant hervez an niver a vugale a zo en eur familh, enebi ouz ar boeson, ouz peb tra hag a zigas paourentez ha dienez.

Rei aezamañchou d'ar paour ne zavfe ket ken kêr d'ar Vro hag ar mizou ret da baea medisined, apotikerien, dispañseriou ha sanaïou evit esaea parea an tuberkuloz.

Kleñved diwar eva-re.

Hevelep menoziou a c'heller ober e keñver ar *boeson* evel e keñver an tuberkuloz. Petra a c'hell beza ar vuhez gant eur boesoner pe eur voesonerez ? Petra a c'hell beza o bugale ? Ha pa vez ar priejou boesonerien o daou ?

Skriva a zo bet graet ha prezeg e pep amzer a eneb ar boeson. Berr e vezo va fennad ; gwelloc'h eget lenn ha klevout ho peus da ober. Sellit endro d'oc'h.

O veza ma z'eus arc'hant bras war ar maez, etre daouarn ar yaouankizou dreist-holl, re stank eo c'hoaz etouez ar re-man, ar re a vez gwelet re dommet d'ezo da zul, pa zeont da c'haloupat d'ar foariou, d'ar marc'hajou. Hag, eur vez eo, marc'hed yaouank zoken a vez ken tommet all d'ezo. Gouzout a rit, koulz ha me, petra c'hoarvez diwar-se.

An eva-re a zo eun tech diaes da ziswrienna ; an neb en deus evet a evo. Eun dra bennak a vank da wad eun ever pa vez goull o alkool.

An alkool a zo evel an taol-fouet a roer d'eul loen. E vertuz ne bad nemet eur pennad. Epad ar pennad-se ar mezvier a zo gouest d'en em rei d'ar gwas oberou : skandalat, trouza, lopa, beza diresped e keñver e bried, e vugale. Eun tech mizus eo ivez hag ar stal ne vez ket pell o vont da stalig hag ar stalig da netra.

Ha penaos ne vefe ket kont evel-se pa ouezer an droug a ra en eur c'horf an eva dreist muzul. Oc'h eva re bemdez, pe oc'h ober kofajou re alies : an nerz a vihana, ar galon hag ar gwazied a galeta, ar c'hof a zeu da goeñvi, an daouarn da grena, an nerz da goueza hag an empenn da ziwoueda. Gwelet ho peus diskianterez eun den mezo, n'ez eus doujans e spered eun den mezo evit netra ; gwas a zo, an tech-se en em zil e gwad ar vugale. Ar vedisined e kêr a lavar anez eo « eur bugel ganet da zadorn » dervez pae ar vicherourien. War ar maez e vez gellet alies ivez, netra nemet o welout korfou dister bugale a zo lavarout : « Bugel ar foar, bugel ar sul ». Ar boeson a laz muioc'h a dud eget na bare medisined gant e vrasa brud. Gwasoc'h e vez peurlies a traou en eun ti pa vez ar vamm troet war ar boeson.

*Eur wreg a zo boazet da eva
A bep hent holl ne dalv netra ;
Ouz pep lealded e serr dor
Hag da bep pec'hed e tigor.*

Pa rebecher d'ar boesoner e dech fall e kav atao digareziou. Arabat kredi ne ve digarez ebet tro ebet. Pep tra a zo eur mell e chadenn ar familh. Ne c'hell ket ar vuhez pemdeziek mont eeun pa vez unan o poania da labourat, egile o feneanti, oc'h eva, o tispign ; unan laouen, egile o soc'horat.

Arabat koulskoude sonjal ez eo difennet eva eur banne gwin, eur banne chistr gant ar prejou. Eur banne gwin mat a zo mat da lipat hag a ra vat p'en em gavit gant eur mignon, banne al laouenedigez n'eo ket difennet, ar c'hontrol eo. Kemend-all pa rit eun afer bennak ; ha ne gredan ket e vefe laouen eur pred baheziant, eur friko, gant dour ha laez. Ne rebechin ket eur banne hini-kreñv d'ar wazed, hini-dous d'ar merc'hed, goude seurt prejou. Ma 'z eus bet lakaet traou mat war an douar gant an Aotrou Doue n'eo ket evit ober fae warno eo. Etre ober fae hag en rei d'ar boeson ez eus gwall gemm. Evesait mat eta yaouankizou ! Diwallit rak tud eus hoc'h oad troet war an eva-re digorit bras ho taoulagad arak mont da vab kaer pe da verc'h kaer boesonerien.

L. L.

AL LABOUR-DOUAR E BREIZ a baec hanter-kant vloaz

Diverra eus eur brezegenn graet e Bleum-Brug Kastellin gant an Aotrou de Guebriant. Rener « Office Central » Landerne.

Penaos edo gwechall douar Breiz.

En amzer dremenet, Breiz a zo bet eun douar diës bras da zarempredi.. Ne oa ket a henchou, hag ar re a oa n'oant ket gwall gaer. Ret eo anzav, avât, n'oa ket gwelloc'h, d'ar mare-se, an traou er rann-vroïou all.

Dre-se, ês eo kompren, ar c'helennoù bras, war al labour-douar, ne deüent ket betek ennomp.

Al labourer-douar, pe ar c'houer, a labourer e zouar hervez ar c'hiz, ha ne glaske nemet tenna anezañ, ar bevañs en doa ezomm evitañ hag e diegez.

Gouesoc'h e oa ar maeziou d'ar mare-se. Kalz e oa stankoc'h neuze ar c'hoajeier hag al lenneier eget ar parkeier labourer.

Ar re, evel ar Saoz Arzur Young pe Cambry, a wladennas hor Breiz e 1788 ha 1794 ne lavaront anezi nemeur a vad. Met, da gredi eo, n'o deus gwelet an traou nemet diwar c'horre, evel dreist ar c'hleuziou.

Penaos kompren, neuze, o defe hon Tadou savet kement a ilizou, a chapelioù, a galvarioù... a vanerioù ken dispar, ma ne oant nemet tud ken diwarlerc'h ha ma lavaront.

Bez'e c'hellomp kredi Arzur Young, avât, pa lavar d'eomp penaos e veze neuze labourer an douar. Na teil na ludu : an taouarc'h pe ar c'hefiou devet, paket en douar da zeiz ar varradeg a veze e holl drempe : tremp treut, douar treut ha drevajou treut. Setu stad douar Breiz da vare ar Revolution Vras.

Hanter-kant vloaz diwezatic'h, eun den gouiziek war al labour-douar, eur Suiss : Lullin de Château-Vieux a ra ivez eun droiad-studi e Breiz.

Lavaret a ra pegement a strouez en deus kavet er parkeier dilezet ; nebeut a winiz, muioc'h a segal ha dreist-holl gwiniz-du. Nebeut a zouar dindan foenn. Mankout a ra boued chatal, ha niver ar chatal, dre-se, a zo bihan ha treut.

Met lavaret a ra dija e c'hellfe ar raz digas kalz a vad e douar Breiz. Lavaret a ra c'hoaz, en deus kavet ez oa ar c'houer « paour ha gouez » met leun a nerz hag a galon evit e labour.

War hent an araokaat.

Diwar hanter an ^{xix}^{vet} kantved eo êsoc'h d'eomp gouzout penaos e wella al labour-douar e Breiz. Mont a ra pep tra war wellaat gant al labourer-douar : difraosta 'ra e zouarou. Ar c'hoajeier hag al lenneier a yeas war a-dreñv. Ar foenneier a en em ledas, ar boued chatal a greskas, hag ar chatal o unan a wellaas o stad hag o niver.

Er memez amzer an eiz hag ar gwiniz a gemer e meur a lec'h plas ar segal hag ar gwiniz-du.


Muioc'h a anevaled, mez ivez, muioc'h a deil da binvidikaat an douar. Ar « maerl » hag an tréz, evit an douarou tost d'ar mor, a deuas ivez da sikour an teil. Kanol an Naoned da Vrest a reas d'an tremp-mañ mont lark zoken er meziou.

Diwezatic'h e voe graet implij eus ar raz, met hep soñjal e oa ret lakaat teil ouz e heul evit mirout outañ da zevi an douar.

Da heul e teuas deskadurez d'ar c'houer a ra d'ezañ en em servicha eus al ludu, « ludu du », « ludu melen » evit gwellaat c'hoaz e zouarou. Gouzout peseurt drevad lakaat warlerc'h eun all a voe ivez eun araokadenn all.

Efin, sevel a reas ar c'houer emglevioù ha sindikajoù ken evit gwerza frouez e zouar ha prena kement en deus ezomm, betek al louzeier nevesa evit laza an emprevaned pe moug al louzeier fall.

(Da genderc'hel.)



ABATI BODGWENN

Breiz a zo bet e-doug ar wech 'douar' santel ar venec'h. Betek 35 manati a zo bet en hor bro araok an Dispac'h Vras. Pevarzek eus ar manatioù-se a oa dalc'het gant bugale sant Bernard : Bégard (1130), ar Releg (1132), Langonnet (1136), S^t Aubin ha Boquen (1137), Lanvaux (1138), Koatmaloen (1142), Buzay (1135), Melleray (1145), Bonrepos (1172), Karnoet (1177), Villeneuve (1202), Prières (1252), La Vieuxville (1147). — Ouspenn, daou vanati all a oa enno c'hoarezed d'ezo : I. V. ar Joa e Henbont ha Kerlot e Kemper.

Koz eo eta manati Boquen pe Bodgwenn. Savet eo bet er bloaz 1137 gant menec'h o tont eus manati Bégard. Diazeza 'rejont o c'houent en eun draonienn sioul ha digenvez e parrez Plene-Jugon etre Lambal ha Sant-Meen, en eskopti Sant-Brieg.

Diouz braster an dismantrou a chom hirio eus ar manati koz, aes eo gouzout ez eus bet ennañ o chom, er grenn-amzer, eun toullad mat a venec'h, moarvat eur chant bennak. Da vare an Dispac'h avat e 1789, ne chome ennañ, evel en darn vrasa eus ar manatioù all, nemet pevar manac'h.

Kollet e-kreiz ar c'hoajou hag al lenneier, ne gaver nemeur a ano eus Bodgwenn en istor hor Bro. Ennañ koulskoude eo beziet Jili a Vreiz, bet lazec dre gasoni e kastell an Hardouinaye, e kichen. Eur manac'h eus Bodgwenn, a greder eo a roas d'ezan, en e brizon, dre varrinier houarn eur prenestr, an absolvenn ziveza. An Tad Abad a lakeas e vezia en e iliz e-harz an aoter vras. Jili a Vreiz a oa breur da Fransez, dug a Vreiz a zo bet siouaz ! penn-kaoz d'e varo.

Diwar ar Revolution Vras, dilezet a-grenn, ar manati a gouezas tamm ha tamm en e boull, hag e kave d'an dud e oa maro da viken dindan an drez hag ar strouez.

Hag e vije bet, marteze, anez eur breizad kalonek ha pennek, an Tad Alexis-Presse, ginidik eus Plougenast en eskopti Sant-Brieg.

Hemañ, er bloaz 1936, e-unan penn da genta, a c'houezas tan adarre en ti koz, hag a grogas da sevel eus a douez an drez e vogerioù dismantrere.

A nebeudigeu e teuas sikour d'ezañ hag emaint bremañ eun toulladig o labourat. Itron Varia ar Bodgwenn, dindan gliz santel an Neñv ha c'houezenn ar venec'h a zo eul liorz o nevezi gant heol an nevez-amzer. Gwarezet gant relegoù santel hor Sent koz, e vo gant Landevenneg tour-tan ar Feiz e Breiz.

V. Seite.

Distro laouen ar Relegou Santel

DA geñver Bleun-Brug ar Sent e Kastel-Paol, er bloaz 1950, hon doa klasket distrei da Vreiz, relegou hor Sent koz, dalc'het du-hont, e Pariz, e « Saint-Jacques-du-Haut-Pas » abaoe amzer an Normaned. Ne fellas ket, avat, da ber-son ar barrez-se, rei aotre d'eomp.

Muioc'h a chans 'en deus bet an Tad Alexis-Pressé, abad manati Bodgwenn (Boquen, C.-du-N.). Deuet eo a-benn da gaout ar relegou santel, gant aotre ar c'hardinal Feltin, arc'heskob Pariz.

Ar relegou-se, mesket abaoe ar Revolution Vras, a zo anezo lodennou eus korfoù sant Magloar, sant Tremeur, sant Melar, sant Samzun, sant Briag, sant Budog, sant Goulc'hen, sant Gurval... hag eun tamm eus toney (tunique) sant Paole a Leon.

Distroet int bet e daou relegouer da abati Bodgwenn e Plene-Jugon (C.-du-N.), d'ar 16^a viz Ebrel diweza, dre vadelez eun nebeut mignoned.

Ar varzed, d'an 12^a viz Gouere, a rae o gouel e Bodgwenn da c'hellout enori ar relegou santel.

Ar gouel bras, avat, a zo bet graet d'ar 27^a viz Eost, dirak ar c'hardinal Roques, arc'heskob Roazon, eskibien Gwened, Sant-Brieg ha Kemper, ha Tadou-Abad Mondaye, Kergonan ha Kerbeneat-Landevenneg.

Eun tammig istor.

Wardro hanter an X^{vet} kantved, e tirollas an Normaned war Vreiz, evel ar brini war eur parkad ed. Ne chome war o lerc'h nemet dismantrou ha tan-gwall.

Ar venec'h a c'hellas tec'het araok al laeron-vor, o kas ganto relegou ar sent. Evel-se ez eas relegou sant Gwenole da « Montreuil-sur-Mer », ha re sant Gweltas betek « Déols ».

E Lehon, e-kichen Dinan edo relegou sant Magloar, bet eskob e Dol. P'edo ar venec'h o war-nes mont kuit, e tigouezas er manati, eun toullad mat a relegou santel all o tec'het araok an Normaned hag o klask eul lec'h dirikl.

Mont a rejont kuit a-gevret, betek Pariz, d'en em lakaat dindan gwarez roue Bro-C'hall.

Da genta e voe laketa ar c'horfoù santel e chapel ar palez, d'ar 16^a viz Here 963. Bez ez oa anezo, lodennou eus seitek korf : Samzun eus Dol, Malo, Luner, Brieg, Korantin, Melar, Tremeur, Gwenaël, Magloar, ar brudeta anezo, ha re all.

Eun abati nevez a voe savet evit digemer ar venec'h, ha laketa e voe ar chapel anezañ dindan paeroniezh sant Magloar.

Pa deuas ar peoc'h, goude ma voe trec'het an Normaned, darn eus ar venec'h a zistroas d'o bro en eur gas ganto darn eus relegou ar sent. — Korf sant Gwenaël hepken a zistroas en e bez.

Eus an holl gorfou all e chomas relegou, kalz pe nebeut, e abati sant Magloar.

Met n'eus nemet korf sant Magloar hag a vije chomet en e bez e Pariz, e-keit ha m'eo aet sant Samzun da « Orléans », sant Lunaire da « Beaumont-sur-Oise », sant Brieg da « Angers ».

E-doug ar c'hanvejoù goude, e teuas c'hoaz relegou all da abati sant Magloar. Dont a reas Sant-Brieg, Elouan, Paol-a-Leon, Goulc'hen, Budog, Turio... met eul lodennig hepken eus pep hini.

D'an 9^a viz Gouere 1318 e voe laketa korf sant Magloar en eur relegouer arc'hant, nemet e benn a voe laketa en eur relegouer disheñvel.

Er bloaz 1582, eur vandenn soudarded a lakeas ar skrab war abati sant Magloar hag a gasas gnto eur sac'had relegou, en o zouez relegou sant Malo ha sant Korantin, koulz lavaret en o fez. Dilezet e voent ganto, avat, e abati sant Viktor.

Er bloaz 1661 e voe digoret relegouer sant Magloar ha roet eul lodenn eus e relegou da iliz Sant-Gweltas-Sant-Leu, e Pariz, da barrez Telgrug e Kerne, ha da leanezed Sant-Denis e Pariz.

Eur skrid eus ar bloaz 1709 a ro d'eomp 'al listenn eus ar relegou a gaved c'hoaz e sant Magloar, koulz lavaret an heveloc'h re a voe laketa eno e 950.

Evit mirout ouz ar relegou-se da goueza etre daouarn dispac'herien ar Revolution Vras, an Tad Tournaire sikouret gant ar breur sakrist a guzas anezo en eun toull en douar. Pa zistroas ar peoc'h, ar breur-se a zizouaras ar relegou santel hag o lakaas dindan an aoter e-barz iliz « Saint-Jacques-du-Haut-Pas », e Pariz atao.

Eno int bet kavet er bloas 1835 pa voe nevezet an Aoter-se. An ao. Quelen, arc'heskob Pariz o anavezaz hag a roas aotre d'o enori.

Gwall vesket e chome, avat, ar relegou, ha n'helled mui gouzout da besa sant e oa pep hini.

Koulskoude, hervez an Doktor Descuret, en deus o studiet piz, eo aes awalc'h gouzout pere anezo a zo eus korf sant Magloar, ha pere eus korf sant Melar ha sant Tremeur, an daou ziweza-mañ, a oa bugale.

An holl Vretoned a vezo anaoudek bras e-keñver an Tad Alexis-Pressé, adsaver abati Bodgwenn, da veza graet d'ar relegou santel-se distrei d'o bro, el lec'h ma vo aes, d'an neb a garo, mont da bedi dirazo ar sent a zo bet Tadou hor Breiz.

Hervez Kannadig Bodgwenn.



BREZONEG YAC'H

Lakaat a reomp aman eun dournadig troiou-lavar, goest da binvidikaat yez meur a hini eus hol lennerien, dastumet amañ hag a-hont :

Kas an dorz d'ar gêr.

Kouezet oa e veudig en e zourn...

Klask pemp troad d'ar maout.

N'eo ket hir ar peuri gantañ.

En noz eo paka siliou.

Laouen evel eur pintig.

Ober eun dra diouz oun dourn.

Ober tro ar chiminalou.

Ne dalvez ket eur penn pour.

Petra ri, emañ graet ganeomp.

Eun teod flemmus en doa hag a spege, m'hen tou d'eoc'h.

Sac'h goull ne jom ket en e sav.

Lakaat an amann re deo war ar bara.

Leze! re a gabestr gant ar re yaouank

Eur bern traou a oa sanailhet en e

[benn.

Laouen ha seder evel ar Spered Santel.

Bihan da welet, bras da c'houzout.

Na savit ket re uhel ar goueliou war

[ho pag.

Goest eo da gas e garr e-unan en-dro.

Va zad a oa eun tammig tost e voned

[d'e benn.

Laket en doa en e benn tenna ar c'haz a zindan ar gwele.

Lipet en doa e dammig trantel ha n'en doa mui eul liard toull war e ano.

.....

Tra-walc'h evit hirio, ha peadra d'ober d'eoc'h lipat ho mourrou. Met, c'houi ive, lennerien ger, a c'hellfe kas d'eomp eur berniad mat a lavarennou ken saourus all. Amañ ez eus plas evito.

Ar bruger.

Eostig Leon

EOSTIG Leon, eus e ano mat Louis Page a deuas er bed, e Kernouez, d'ar 26 a viz C'hovevrer 1871. Ar c'houec'hvet e oa eus a unek bugel. Ober a reas e studioù e skolaj Lesneven.

Bez 'ez oa eur paotr yac'h daoust ma kare ar sioulder : hunvreal e skeud ar gwez, en eur selaou kan al laboused ha tañva kaerderiou an natur a veze e blijadur. Danvez eur barz a oa ennañ.

Abred e renkas paouez gant ar studi. Mont a reas da labourat d'ar skolaj ha goude da di ar Retred e Lesneven.

E-doug e amzer vak e kendalc'has da zeski. Mont a rae d'ar patronaj, el lec'h ma kavas mignoned vat. Eno e plije d'ezañ c'hoari ha kana, rak bez 'en devoa eur vouez eus an dibab.

E vrasa c'hoant a oa mont da veleg. Evit-se ez eas da « Poitiers » ha da Langonnet. Met maro e dad a reas d'ezañ distrei d'ar gêr el lec'h ma n'helled mui ober hepdan. Soursial a renkas ouspenn ouz diou nizez d'ezañ, maro o mamm.

D'e dri bloaz-ha-tregont, war ali e berson e timezas, ha dont a reas d'ezañ c'houec'h a vugale.

Bez 'ez oa sakrist ha kaner er barrez. Neuze eo e savas eun toullad mat a ganaouennou war c'houlenñ e vignoned. Darn anezo a zo chomet brudet.

Piou ne anavez ket : « *An daou varz* » ken brao ha ken kaer ar c'homzou hag an ton anezañ ; dreist holl « *Ar Falc'herien* », ken taolennus ha ken beo. Ar Jasisted, e-touez o c'hanaouennou, n'o deus ket gwelloc'h. C'hoariet hag adc'hoariet eo bet ar ganaouenn-se n'ouzoun ket pet kwech, atao gant efed bras, evel ma 'z eus bet gwelet e Bleun-Brug Kastellin. « *Yann ar Roudouz hir* », « *Son an hañ* », « *Gabrielig Keramoal* », « *Bokedig tro 'n heol* »... a zo ivez diwar e bluenn.

Ar brezel 14 a gargas e ene a velkoni, ha diwar neuze ne skrivas nemeur. Ne lamas digantañ avat hini ebet eus e berziou mat.

Ne glasse ket an enorioù, ar pezh a rae d'ezañ lavarout d'eur c'hazetenner eus an « Ouest-France » deuet d'e c'houlenñata : « Evit beza eürus, eur barz a dlefe beva e dounder ar c'hoajou ». Ha c'hoaz : « Er Baradoz me'n em guzo en eur gommoulenñ ».

Madeleuz e oa e keñver ar re a rae gaou outañ, ha c'hoarzin a rae leiz e galon, pa wele en eur gelaouenn bennak, unan eus e varzonegou, dindan sinadur eun all, pe pa gleva radio-Kimerc'h o kana unan eus e ganaouennou, ton ha komzou, hep lavaret e ano. Gwir eo, alies ne gemere ket ar boan da sina e skridou.

Ne werzas nemet eur wech e wir a oberour.

Edo, eun devez o tont eus foar Lesneven, diès e benn, rak n'en doa ket bet arc'hant awalc'h evit prena eul loen.

En eun taol, unan o redek war e lerc'h a reas d'ezañ chom a-zav. Eur marc'hadour kanaouennou e oa hemañ :

— Ha ne c'hellfe ket gwerza d'in ar gwir da voula son « *Ar Falc'herien* » ?

— Ma karez avat !

— Pegement ?

— O ! ar pezh a blijio d'it.

— Setu !

Hag ar marc'hadour a roas d'ezañ just ar pezh a vanke evit ober e foar.

Kinniget e voe d'ezañ beza kaner e Brest hag e Landerne, pe studia evit mont en eur c'h - « conservatoire ».

Biskoaz avat ne fellas gantañ kuitaat an atant vihan a labour e Kernouez. E vloaveziou diweza a dremenas o pourchas e varo. Aon ebet n'en doa da vervel, ha pa varve unan bennak er barrez e lavare :

« Setu eun all hag en deus laeret adarre va zro diganin. »

D'an deiz araok e dremenvan e lavare d'e verc'h :

— Mervel n'eo ket trist, va merc'h ; mervel, evit eur c'hristen, a zo mont d'ar gear. »

Nebeut araok rei e huanad diweza, e kane c'hoaz : « In manus tuas, Domine, commendo spiritum meum ».

Maro eo, met eus lein an Neñv e kan atao :

« *Ha pa vo nijet va ene,*

« *Eus Breiz-Izel warzu an Ne,*

« *Er Baradoz c'hoaz me gano*

« *Bro ar reier hag an dero.* »

D^r Laurent ha V. Seite.



BOKEDIG TRO 'N HEOL

O bokedik skedus tro 'n'heol
Ken anavezet gant an holl,
Te eo a zigor da gentañ
Gant da genvreur ar boked-hañv.

Te 'zo evel eur steredenn
O lintra e-kreiz ar c'hlizenn ;
Te a vousec'hoarz gant karante
Ouz bugel an Aotrou Doue.

Da zeliou kaer a zo ruz-gwenn,
Da galon aour a zo melen,
Melen evel ar boked lann
Hag ar bleun a zav er balan.

Biskoaz miz Meurzh gant e varrou
Na reas d'it mervel gant ar riou ;
Ar vuhez ennout 'zo kalet
Vel e kalon ar Vretoned.

Lavar d'ar re em eus karet
Diwarnout e nij va spered,
En da yez lavar d'ê sioulrik
O deus eur plas em c'halonik.

Ar garantez a vev ato,
Rag trec'hed he deus ar maro.
Ya sur, en tu all d'ar beziou
En em gar c'hoaz ar c'halonou.

Louis Page.

Unan, gwall dapet

Eun ostiz a oa o vont da lakaat ar prenn war e zor hag e brenecher; pa zigouezas unan da c'houlenn eun nebeut defotachou da brena.

— « Tostait da domma da c'hortoz, eme an ostiz; me 'zo o vont da zervicha ac'hanoc'h dioc'h-tu. »

Hag hen da beurzarra ar prenecher; met a-dreuz ar gwer, e selle avat, rak ar paotr aet, en ti, n'en doa ket kalz a zoare vat.

Pa oa lakaet ar stalaf diweza, e welas an divroad o tapa peg en eun hanter lur amann, a oa war an daol, o kloza anezan en e vouchouer godel hag o vounta ar pakad dindan e dog.

An ostiz ne ziskouezas netra. Dont a reas er stal hag e komzas brao d'ar c'hanfard :

« Chomit eur pennadig da varvailhat ha da domma... Yen eo, er mēz, da zuilha va den; — Amzer a-walc'h ho peus !... »

Hag en eur gaozeal, e plante glaou er fourniez, ken a zute.

« Lakit eur c'horniad, emezan... ! Eur bannig traou tomm a rafe vad d'eoc'h ive ?... »

Hag hen ober d'an divroad azeza e kichen an tan. Met heman a zante e amann o wakaat.

« Mall eo d'in, mont en hent, emezan, eman an noz o tont hag ouspenn n'emaoun ket e poan da zale ac'hanoc'h ! »

— Ale ! Ale ! Eur banne traou tomm da genta... Petra zonjit ? Sklasi raje ho kwad o vont evelse a-benn d'an avel... »

Ar vatez a erruas, ganti diou werennad rhum bervet.

Ret mat e voe d'ar paotr eva e hini. Ar voged anezi a reas d'ar gwad sevel d'e benn ha d'an amann tanaoat muioc'h mui. Prestik e voe gwelet takaden-nou melenn o ruilh war e dal. An ostiz a rae an hini ne wele netra hag a zalc'he da zatouilh, ar muia ma c'helle :

« Pegen eurus, emezan, an nep en deus eun tamm tan da domma gant ar gwall amzeriou-man... Met na'g a geraouez war ar glaou !!! »

Neuze e reas eur zell ouz an tommer. Heman ne ouie mui pelec'h en em lakaat, tomm oa d'ezan war gorre, tomm dindan.

« M'eus aon, eme an ostiz n'emaoc'h ket en hoc'h aes — Gwall c'houezi a rit, va den mat. Tennit ho tog ha roit anezan d'in... »

Hag ec'h astennas e zourn evit hel lamet digantan. Al laer, avat, a zavas plom en e sav, a glaskas mont war e giz hag o tapa krog en e dog gant e zaou zourn, e lavaras :

« Nann, nann, laoskit ac'hanoun da vont kuit... Klanv oun !

Dres, d'ar mare-se, e ruilhas an amann teuzet en e zaoulagad, en e vruched ha betek en e voutou... An ostiz ne oa ket eur gwall den. Rei a reas plas d'ar paotr da vont er-mēz :

« Pa peus kement a c'hoant d'en em jacha, ne virin ket ouzit ! »

Gant e vouchouer, al laer, mezek, a dorche an amann, a zivere a bep tu d'e jodou :

« An tamm ebad am eus bet, eme an ostiz, a dalv bemdez priz eun hanter lur amann. Chach da skasou ganez, met diwall avat da ankounac'haat ar gentel. »

(Kontet d'in gant Lommig.)

C'HOARZOMP

RE SOT EVIT MONT D'AR BARADOZ

An Toug'n koz a varvas ive, evel ma c'hoarvez gant kalz ac'hanomp. Kerkent ez eas da c'houlenn digor digant Sant Per.

Mez evit doare, n'edo ket re eun gantañ e aferiou. Rak Sant Per a save e vouez :

— Nann, amañ ne deui ket, evit c'hoaz, pa lavaran d'it. Goude eun tamm tro er pugator ne lavaran ket.

— Alato ! Sant Per, n'emaout ket o vont d'ober d'in kemend-all, me eur pesketaer evelout !

— Ta ta ta ta ! eun tamm pinijenn araok. Gouzout a rez ne vezes ket atao diwar an dour.

— Gwir eo, marteze, Sant Per bacur, met daoust ha ne gav ket d'it em eus graet pinijenn a-walc'h war an douar ?

— Ha dimezet out ?

— Ya ta ! daou ugent vloaz 'zo !

— Daou ugent vloaz gant eur vaouez ! O ! neuze, deus buan er Baradoz, gounezet mat eo ganez.

Hag an Toug'n koz, eur pezh lorc'h ennañ, mont er Baradoz.

E-keit-se edo Lom ar Pêul o c'hortoz e dro, ha klevet gantañ penn-da-benn istor an Toug'n koz. An besketarienn, evel a ouzoc'h, a vez boazet atao da gaozeal kreñv.

Hemañ, kennebeut, n'edo ket diroufenn e stal, rak gwall griza a rea Sant Per e fri, en eur sellet ouz e baperiou.

— Hum ! Mezaoun e vo ret d'it tremen eur pennadig dre ar purkator.

— O ! Sant Per, en han' Doue, n'it ket d'ober d'in kemend-all. (Lom a yae dre c'houi da Sant Per ; n'oa ket pesketaer evel an Toug'n.) Sonjit 'ta Sant Per, me a zo dimezet...

— A ! Dimezet out ?

— Ya, paour kêz Sant Per, diou wech oun bet dimezet zoken.

— Diou wech ? Ma biskôaz kemend-all ! Re sot neuze evit mont d'ar Baradoz.

Hag e serras e zor gant sklak.

KAS AN DORZ D'AR GÉR

O tistrei eus Lourd.

Emañ c'hoaz he madelenn gant Franseza, stag ouz he bruched.

Ne sell ket en-dro d'ez. Huñvreal a ra. Da gredi eo emañ c'hoaz he spered dirak ar Werc'hez e Grot Massabiell.

Eur beajour, eun aotrou kran, diouz e welet, a sell ouz Franseza, ouz he medalenn, gant eur mousc'hoarz goapaus.

— M'eus aon, emezañ, c'houi ivez ho peus gwelet ar Werc'hez, du-ze, e Lourd ? Franseza, souezet, a sav he sell war an aotrou.

— Ya 'vat, emezi, gwelet am eus ar Werc'hez...

— Soñjal a-walc'h a raen, emezañ.

Hag e c'hoarz leiz e c'henou.

— ...Ya da ! eme Franseza ; ar Werc'hez, hag ar Mabig Jezuz, ha sant Jozef ive am eus gwelet, evel e kraou Betleem. An azen, avat, n'am oa ket gwelet ; met bremañ emañ dirazoun.

Hag hi da vousc'hoarzin, d'he zro.

Eno, m'hef lavar d'eoc'h, e savas plijadur e-touez ar belerined ! An azen, kouezet e flipenn war e flipenn a yeas kuit lostek.

DRE AR C'HELAOUENNOU

« Ar bedenn evit ar Vro » a zo ano eur gelaouenn nevez roneoskrivet, ha renet gant ar beleg Loeiz ar Floc'h, anezi e tennomp ar pennadou da heul.

Ar bedenn evit ar Vro.

SETU dija eur bloavez tremenet ma oa bet kaset war raok, gant ar mou-ladur, al levrig a anavezit, *ar Bedenn evit ar Vro*. Ne c'hortezen ket kaout eur bern tud o'n em lakaat war ar roll, rak dikoaz n'em eus soñjet en divije an niver bras talvoudegez drezañ e-unan. Souezet on bet ha plijet o welout ar paperennou-emouestla o tistrei stankik awalc'h. 11 a zo bremañ enskrivet en derez kentañ, 10 en eil derez, 7 en trede derez, ha 5 e-touez ar veleien. Evit an nebeut a embannerez hor boa graet endro d'hor soñj, eo mat-kenañ, a gav d'in. Tu a zo moarvat da vont pelloc'h ha da gaout izili en tu-hont, ken e-touez ar veleien, ken e-touez ar re all.

N'emaoc'h ket c'hwi hoc'h-unan-penn. A-dal bremañ e sav bemdeiz war-du an neñv pedenn Vreiz evit silvidigez speredel ha korfel ar Vro. Rak n'hon eus ket da zisranna ar pezh en deus unanet Doue : kement a zo ac'hanomp eo hon eus da salvi.

Kalz ac'hanoc'h o deus roet o ano gant birvilh ha gred. Spi hon eus hoc'h eus kendalc'hehet da vont daoust da skuizder an deiziou. N'eus forz penaos e oa poent sevel eur C'hannadig a vefe eul liamm kenetre-zomp hag eun tu da zegas deoc'h kelou eus an unvaniez.

Pez a oa gwir bloaz 'zo a zo ken gwir all bepred. Bez' e c'hellomp kalz evit Breiz o pedi evit he dasore'h : Doue eo mestr an Istor. Skoit ouz an nor, ha dre forz skei e vo digoret deoc'h. Hep konta ma roio deoc'h fiziañs ha nerz-kalon e kement a rit evit Breiz.

N'ouzomp ket petra zegaso an darvoudou arc'hoaz. Peoc'h da badout ? Ne gredan ket kalz. Freuz ha reuz, brezel ? N'ouzomp ket. Moarvat muioc'h a gemm eget na gredomp. An Tad Santel ar Pab ne ehan ket da lavarout ez omp tost-tost da zarvoudou ar pouezusa.

Plijout a rafe d'in ivez e vefe ar C'hannadig-mañ eun tu da eskemma kene-trezomp soñjou ha mennadou. Petra c'hortozit da skouer kaout er c'hannad-mañ ? Daoust hag e c'hellfemp sevel etre tud an unvaniez lennaduriou-tro, dre leakaat da vont studiadennoù, troidigeziou, traou ha n'hellont ket beza liesskrivet, met a zo aes da skriveriza e meur a skouerenn ? Pe kentoc'h testennoù eeun da lenn, pedennoù dibabet ? Ho respontou a c'hell hon henchas.

Mirit ar follennou-mañ. War o lerc'h e teuo reou all, bep tri miz, pe stankoc'h marteze. A-benn eur pennad e vo etre ho taouarn eur strobad mat a blijo deoc'h adlenn ennañ tra pe dra.

M. G.

Ar Bibl e brezoneg.

Setu kant vloaz 'zo dres e 1853 e oa embannet e Gwengamp, e ti Jollivet eun **Testament nevez**, hep ano oberour. Eul lev'r rouez awalc'h eo deut da veza. Notet em eus em skouerenn eo bet savet gant eur beleg eus Lanrodeg. Siwaz ! n'eo ket brezoneg dispar. Dont a rae war lerc'h an **Testament nevez** protestant, moulet e ti Edouar Anner, Brest, e 1851 ; war lerc'h **Testament nevez** ar Gonideg a oa bet **lekeat e gwaskerez** e Angoulem er bloaz 1827 (Bibl Santel ar Gonideg ne zeio nemet diwezataoc'h, 1866, e ti Prud'homme, St-Brieg). Ret eo anzav n'eo ket splann an holl labouriou-se nag ekeñver ar yez, nag evel troidigeziou e-keñver ar vammskrid.

Kalz gwelloc'h eo ar pezh en devoa graet an ao. beleg Yann Willou Herri, hag embannet e 1849, e Kemperle. Met perak n'eo ket aet en tu-hont d'ar **Genes pe Lev'r ar C'henellez** ? Eun destenn a dalvoudegez hor bihe dija.

Chom a rae eta al labour d'ober Setu perak, warlene ; e teue ermaez levrenn genta eun droidigez nevez : **Aviel Sant Mazhe**. Degemeret mat eo bet gant ar vroga-

rourien ha kalz a veuleudi hon eus bet diganto. Hogen nebeut-kaer a skouerennou a zo bet gwerset e-touez ar veleien hag ar bobl. Ar sin eo e vez dilezet muioc'h mui ar yez ganto. N'hellomp ket gortoz gwerzañ ouzpenn 400 eus an avieloù a chom da voula, ha pa lavaran 400 ez on brokus. Setu perak evit ar peurrest eus ar Bibl n'hellomp nemet liesskriva.

E-giz taol-esa war ar poent-se emañ o paouez dont er-maez eul levrig eus an Testament Koz, **Koheleth**, an Eklesiast mar 'd eo gwelloc'h deoc'h. War e lerc'h e teuo **Diskuliadur Sant Yann**, a zo bet kaset d'ar roneo en deiziou-mañ.

Aviel Sant Yann a zo ivez etre daouarn ar mouler abaoe pevar miz. Met kaer am eus bet goulenn hag azgoulenn ne welan ket an amprouennoù. Prometet e vezont d'in bep sizun, met n'eo ket gwelloc'h ar jeu evit-se. Hast am eus koulskoude e teufe ermaez hep dale, rak an droidigez aozet gant an ao. Klerg a zo d'am meno, eus ar c'hentañ.

Evit kaout embannadurioù ar Bibl brezonek, o goulenn hiviziken digant an Dimezell St Gal de Pons, 48, rue des Salles, Gwengamp, C.C. Rennes 51.940. Aviel Sant Mazhe a zo 280 lur ha 30 lur evit ar mizou-kas. Koheleth a goust 80 lur hag 20 lur evit ar mizou-kas. Pa gemerer meur a skouerenn war un drô, kontañ 10 % evit ar mizou-kas.

Ar gelaouenn, savet evit unanñ ar re a fell d'ezo pedi evit hor bro ar c'hell beza goulennet digant ar rener, 5, rue des Capucins, Saint-Brieuc.

MA C'HORNAD DOUAR

Me ' gar ma c'hornad-douar, 'lec'h ma 'z on bet ganet,
'Lec'h ma 'z on bet luskellet gant ma mammig karet,
E-lec'h m'am eus tremenet ma holl bugaleaj
O selaou al lapoused da gana o ragaj.

Me ' gar ma c'hornad-douar, zoken da gala-goañv,
Daoust ma vez kollet gantañ e binvidigez hañv ;
E c'hlaizez ' zo tremenet hag ive e frouez,
En despet da gement-se en deus ma c'harantez.

Me ' gar ma c'hornad-douar dindan e linser wenn,
Pa vez e gousk oc'h ober 'pad ar goanv penn-da-benn,
Gwisket gant reo ar mintin, kaerat mantell skedus !
Dindan an heol o luc'ha evel mein prizius.

Me ' gar ma c'hornad-douar pa zeu da zihuna
Eus e gousk hir goanvek ha pa zeu da domma
Gant heol an nevez-amzer a laka bokedou
Warnañ druz da ziwana, marellet a bep liou.

Me ' gar ma c'hornad-douar pa vez deuet an hañv,
Pa welan an eost melen o vranñsellat warnañ,
Pa welan, er gwerjeou, pleget brankou ar gwe
Gant avalou a-vil-vern en-istribilh oute.

Me ' gar ma c'hornad-douar 'balamour d'an êr vat
A ro d'in atô yec'hed ha nerz da labourat.
Ennañ ez on-me eürus o selaou ar zoniou
A vez er gwez o kana al lapousedigou.

Ha bemdez em fedennoù, a-galon, me ' lavar :
« Trugarez d'eoc'h, ma Doue, 'vit ma c'hornad-douar !
« C'houi ho peus d'in her roet ha d'eoc'h ez on dleour
« Eus ma c'hornadig-douar a dalv muioc'h 'get aour ! ».

Ao. Henry.

BUHEZ AR BLEUN-BRUG

Bez e vo ar Bleun-Brug bras, e 1954, e kêr Gwened, d'ar sul kenta a viz Eost. Mil bennoz Doue d'an Ao. 'n Eskob Bellec, d'an Ao. Meur Baron, Vikel Vras, ha d'an Ao. Decker, m'êr Gwened, da veza graet d'eomp eun digemer ken mat.

Bleun-Brug Gwened a vo Bleun-Brug ar c'han pobl : sonioù, gwerzioù, kantikou. Ra glasko pep hini, an holl ganaouennou a chom c'hoaz divoull, evit o c'has d'eomp, amañ : Bleun-Brug, Châteaulin. Goulenn a reomp ivez eur skouerenn eus an holl gantikou moulet ep pep parrez war folennou distag.

Pet a glevo hor galv ?... Gwelet e vo.

Ouspenn, ar Bleun-Brug bras a enoro Sant Visant Ferrier, a zo e relegou e iliz-Veur Gwened, marvet m'eo bet er gêr-se er bloaz 1919 — 500 vloaz a vo e 1954 abaoe m'eo bet digoret ar prosez a lakeas anezañ war roll ar Sent e 1955.

Meneg a vo graet ivez, er memes Bleun-Brug, eus Kadoudal, ar Breizad kalonek a stourmas kement ouz an dispac'herien. E 1953 e vezo 150 vloaz abaoe e varo.

Ober a raimp adarre Bleun-Brugou bihan. Hini Leon a vo graet e Landi. Ar re all n'ouzomp ket mat c'hoaz e pelec'h e vezint graet.

Savet hon eus er Bleun-Brug, eur gomision evit soursial ouz al lazou-kana. Renet eo gant an Ao. Paol ar Flemm, muzisian brudet en deus e-giz sekretourien : an Ao. Marrec, beleg hag ar Frer Stephan evit ar Finister, an Ao. beleg Goasdoue, evit ar C'h.-du-N. hag an Ao. beleg Derian, evit ar Morbihan. An hini en deus ar Bleun-Bras en e eskopti a zo karget da zibab ar c'hanaouennou evit ar c'henstrivadegou ha d'o renka e-unan, pe dre eun all, evit beza kanet e meur a vouez.

Digor eo adarre hor skol dre lizer. Evit kaout ar c'hentellou brezonek n'eus nemet skriva da V. Seite, Bleun-Brug, Kastellin.

Bretoned, desket 'ta skriva ho yez !

Daou briz a brezegerez a 10.000 lur pep hini, unan evit ar baotred, eun all evit ar merc'hed, a vo roet e Bleun-Brug Gwened. Kinniget eo ar prizioù-se gant an Itron a Rohan-Chabot.

EUL LIZER FREALZUS

Hor mignon mat R. G. desket gantañ ar brezoneg ha kenlabourer d'hor c'helaouenn, a skriv d'eomp :

Kas a ran d'eoc'h eur pennad skrid da embann e « Bleun-Brug ». Kaset em boa an hini kenta d'an Ao. Bleunven...

Breur eus Trede-Urz Sant Fransez e vezin. Drezoc'h eo ez oun deuet d'an T. U. koulz lavarout.

Anavezet em eus an T. U. gant buhez ar Zant, « Bleuntou St Fransez », levrioù hag oc'h eus kuzuliet d'in da lenn. Kermeret a ran burell St Fransez d'ar 4/10/53. Meulet ra vezo hon Tad St Fransez.

Ho trugarekaat a ran a greiz kalon eus a se.

Setu eur pennad 'zo n'em eus ket skrivet e brezoneg. Eur wech an amzer hepken. Bremañ e fell d'in lakaat en hor yez an istorioù plijus a gont va mamm-gaer e portugalieg.

Kalz labour am eus d'ober er barrez gant an Ao. Person. Sevel a reomp eur gelaouenn parrez, ni hon daou. Bez ' hon eus bodadegou evit an tiegezioù. Pep hini, d'e dro, a rank uoza ar vodadeg, da lavarout eo, prepari eun dra bennak diwar-benn an Aviel.

Adkristenaat ar vro eo a zo da ober. N'eo ket, rann-vro Soissons eur vro a feiz, pell ac'hano ! Rak-se e tleer ankounac'haat e vevel e parrezioù. Prest omp d'ober evel en Afrika.

Da lavarout eo :

Ar beleg a chom gant peder pe bemp parrez. Lavarout a ra diou oferenenn bep sul, met unan pe zaou avielar a yelo d'ober eun ofis er parrezioù a chom hep oferenenn.

Lenn a raimp Aviel ar Sul. Lakaat a raimp an dud da gana ha da bedi. Displega a raimp ivez an Aviel.

Eul labour kaer e vo, ha laouen oun en abeg ma 'z oun bet dibabet evit kaout an enor-se.

Eun enor eo, met eul labour ivez. Ret eo d'in beza kreñvoc'h-kreñva em feiz ha desket warni.

Rak-se eo moarvat, en deus an Ao. Doue galvet ac'hanoun da veza breur Sant Fransez. N'eo ket dre lorc'h eo e displegan kement-se d'eoc'h. Ken laouen ez oun, ma 'za va fluenn hec'h unan penn, koulz lavarou. Er bloaz 1953 ec'h eostan eun drevad puilh a c'hrasou. Meulet ra vezo ar C'hrist evit e vadelez.

Ganeoc'h a greiz kalon, evit Doue hag ar vro.

R. G.

Meur a gentel, neketa, a gaver ei lizer-mañ. Da genta eur skouer a feiz birvidik a-berz eur gwir abostol. Pebez kentel ivez evit ar bern Bretoned-se, hag a vefe ken es d'ezo deski lenn ha skriva o yez, m'o defe en o c'hreiz ar bedervet eus ar garantez a zoug R. G. d'hor brezoneg.

KONTADENN A VRO PORTUGAL

EUR PARKAD MEIN

Emañ Hor Salver ha sant Per o vale dre ar mêz. Tremen a reont a-hed eur park, ennañ eur c'houer o labourat.

Hor Salver a lavar d'al labourer douar :

— Demat, tieg !

Hag an den da respont :

— Mat pe fall, ar memes tra eo.

Emañ an tieg oc'h hada : Jezuz a gendalc'h :

— Petra 'maoc'h o hada, tieg ?

— Hada a ran mein, a respont an den.

— D'eoc'h da eosti mein, eme Hor Salver.

Eun tammig pelloc'h ez eus eun tieg all. Hor Salver a doull kaoz outañ, en hevelep doare :

— Demat, tieg !

Hemañ a respont d'ezañ seven :

— Demat, Aotrou !

Hag ar C'hrist da gendalc'h :

— Kalonek e labourit tieg.

— Ya, Aotrou ! Ret eo labourat start evit sevel va ziegez. Hada a ran, met n'ouzoun ket hag eosti a rin. Fizians em eus koulskoude e madelez Doue.

Ha Jezuz da lavarout d'ezañ :

— Labourit, labourit hag e tastumoc'h eun eost kaer.

Ar c'houeriad droug a yae bemdez da welout e bark. Netra ne ziwane : mein hepken.

— Ar c'houeriad all a wela e winiz o kreski. Bemdez e veze gwelet o vravaat, ken na oa eun dudi sellout outañ.

Ha sant Per a lavaras d'an Aotrou :

— Aotrou, perak e kastizit kement ar c'houeriad kenta ? Perak ne ziwane ket e had keit ha m'emañ egile o vedi eun drevad ken puilh ?

Hor Salver a zisplegas d'ezañ :

— An hini kenta a labour, lorc'h ha gwarizi ennañ, e-lec'h egile a labourer nerzus da zastum e beadra, gant fizians e madelez Doue, eun hag izel a galon.

Rak-se e oa ret d'in diskouez ne reer netra vat pa reer gant lorc'h. « Neb a labour hep Doue a goll krenn a labour. »

An dud diwar ar mêz a anavez an istor-mañ e Tras-Os-Montes, rannvro hanternoz Portugal. Pep labourer a bed an Aotrou a zoare goude beza hadet :

— Ra vezo benniget hon labour.

Va Doue, mirit hon labour.

Va Doue hon diwallit ha diwallit hon labour.

Breur Dominik.

KELEIER

Bretoned a ouenn vat.

« E pelec'h, eme Kalloc'h, emañ ar wagenn ha n'he deus ket doujet da dud va gouenn ». Hag e c'hellomp lavaret ouzpenn : e pelec'h emañ herio ar vro ha n'eus ket enni Bretoned ? O c'hayout a reer, stank a-walc'h, en Amerika, eus an nec'h d'an traoñ.

An Tad Anton-Vari-Filip, a zo d'ar mare-mañ o tremen eun nebeut diskuiz e parrez e gavell, e Lanvaudan. Dont a ra eus an Amerik (Stadou-Unanet).

Ganet e 1891, ez eas da veleg e Urz Tadou Augustin an Assompsion. Kerkent ha beleget, e 1917, e voe anvet da vont d'an Amerik. Da genta e kelennas en eur skolañ vras e Worcester.

E 1939, Arc'heskob New-York a anvas anezañ da gure, er gêr vras-se, e parrez Itron-Varia an Espérans, karget er memes amzer eus Iliz-Veur sant Patrig. Azalek 1949 her c'havomp person ar barrez spagnol Itron-Varia ar Guadeloupe.

An Tad Filip, o c'houzout mat atao ar brezoneg, a oar bremañ n'ouzoun ket pet yez. Deuet eo da veza den a fizians ar c'hardinal Spellman, arc'heskob ken brudet New-York. Dre-se, en deus bet tro da veaji e kalz broioù.

Kement-se, avât, ne wir ket outan da veza Breizad penn-kil-ha-troad ha da garet a greiz e galon yez ha bro e gavell.

✱

Eur Breizad all, an Tad Queguiner, eus Misionou an Dlavéz-Bro, a zo bet anvet gant hon Tad Santel ar Pab, kuzulier ar greizenn gatolik etrevroadel a genurzh e-kichen an U.N.E.S.C.O. Gmidik eo an Tad Queguiner eus Montroulez.

✱

Tri c'hant vloaz 'zo, d'ar 4 a viz Gwengolo 1653, e varve al leanez Anna-Maria a Jezuz, e manati Beneadezed ar C'halvar e Pariz.

Eur Vreizadez e oa. Dont a reas er bed, Anna de Goulaine, e Kastell Poulmig, e kichen Kraozon, d'an 20 a viz Gwengolo 1599.

Kalet kenañ e voe he yaouankiz. Gouzañv kalz a reas a-berz he mamm, met bepred gant pasianted. Leun e oa a garantez evit ar beorien hag ar glañvourien.

Pa voe lezet gant he mamm, ez eas da leanez e 1629, da Galvar Montroulez. Diou c'hoar he doa eno dija, hag eun all a deulo c'hoaz war he lerc'h.

Eur vuhez santel meurbet a renas Anna e Kalvar Montroulez e-pad meur a vloaz. Mont a reas goude da Bariz. Eno e voe renet gant an Tad brudet Josef Tremblay.

Dre hanterouriezh an Tad-se, e kemennas Anna d'ar Roue Loeiz XIII gouestla ar Frañs d'ar Werc'hez Varl. Ar pezh a voe graet d'ar 15 a viz Eost 1638, hag a vez lidet bep bloaz, abaoe, deiz gouel Maria-Hanter-Eost.

Breiz eta, kentoc'h eget Bro-C'hall eo a dlefe beza anvet Rouantelezh ar Werc'hez-Vari.

✱

Eured vreizat.

Loeiz Roparz eus Poullaouen, a gas d'eomp kelou eus eured e vreur, Marsel gant M.-L. Boulenger, bet lidet e Poullaouen d'an 12 a Wengolo. An ao. chaloni Ar Ster, ensellour ar skolioù, a lavaras an oferenn. Ar brezegenn a voe graet gant an ao. chaloni Herve, vikil-vras.

Ar c'helc'h keltiek gwisket en e bez gant dilhad ar vro, a ganas kantikou brezonek. An dud nevez a voe kaset d'an iliz gant bombard ha biniou, goude « Dans ar boked », war ar blasenn, an dud ganto en o dorn bep a voked bleun-brug.

Epad ar pred ez eus bet kanaouennoù brezonek hepken. Ar plajou a veze digaset war an daol ouz ton ar vombar hag ar biniou, evel gwechall. E-kreiz ar pred eo bet danset, evel ar c'hiz, « Dans ar rost ».

Diouz an noz, e voe eun abadenn gant bagad Koat-Serc'ho.

Ha setu penaos, e-kreiz Menez-Are; e kaver c'hoaz, herio an deiz, eurejou hag a ra'enor bras da Vreiz.

Ar familh Roparz eo he deus savet evit Bleun-Brug Kastellin, « Pastoral Poullaouen » a zo bet kement plijet d'ar selaourien.

Meuleudi, yec'hed peoc'h ha levenez d'an ao. ha d'an Itron-Marsel Roparz.

Klaskit d'eomp lennerien nevez.



KAMP AR VREZONEGERIEN

C'hwec'hvet Kamp ar Vrezonegerien a zo bet dalc'het e Plozeved, eur barrez koant a Vro-Gerne, e bord ar mor, adalek an 3 betek ar 16 a viz Eost.

Ar re a gred c'hoaz n'eo mat ar brezoneg nemet da vlenia chatal ha da envel benvegou al labour-douar, n'o defe nemet mont da dremen eun nebeut devezioù e Kamp ar Vrezonegerien evit ma ve kemmet o meno.

Eun dra talvoudus a voe savet pa voe krouet Kamp Etrekeltiek ar Vrezonegerien, eun nebeut bloavezioù 'zo. Abaoe ma 'z eo bet krouet, e vez dalc'het pep hañv, e miz Gouere pe e miz Eost, e-pad pemzektez bennak, en eur barrez a Vreiz-Izel. Dibabet e vez bep taol, evit hen dere'hel, eur barrez hag a vez yac'h awalc'h ar brezoneg enni. E-touez an aozadurioù savet evit entana er yaouankiz karantez evit ar yez, Kamp ar Vrezonegerien a gemer muioc'h-mui eur plas eus ar re dalvoudusa.

Eur c'hamp brezonegerien hag eur c'hamp etrekeltiek a zo anezañ. Digor eo d'an holl vrezonegerien a fell d'ezo tremen eun nebeut devezioù o komz diwar-benn pep tra hag o 'n em ziduella en eur implijout ar brezoneg nemetken. Eul lec'h bras a vez roet ennañ d'an diduamant : kaniri, c'hoarioù, heilhadegou, baleadennoù. Met eul lec'h ken talvoudus all a vez roet d'ar studi : deski gwelloc'h brezoneg, en em voaza da gomz, da lenn ha da skriva ar yez, tremen arnodennoù (eksaminou). Bep bloaz, a-hend-all, e teu d'ar c'hamp eun nebeut tud eus ar broioù keltiek tramor, ha dreist-holl Kembreiz. Yez ar re-mañ, ar c'hembraeg, a zo kar ha tost awalc'h d'ar brezoneg, eun niver bras eus ar gerioù boutin o veza an hevelep re en diou yez. E-doug ar c'hamp, kalz a Vreiziz a zesk kembraeg, ha Kembreiz a zesk brezonek. Ha meur a hini a guita ar c'hamp gant ar soñj start da gendere'hel eur studi boulec'het en eun doare ken plijus. Rak ret eo lavarout e ren e-pad ar c'hamp eur vignoniezh dispar ha don etre an holl izili, n'eus forz eus pe vro e vefent. Pez a ziskouez n'eo ket ar yezou eun abeg a zizunvaniezh etre ar pobloù. Anavezout a ran tud a zo bet aet d'ar c'hamp evit eun devez pe zaou, evit gwelout petra e oa, hag a zo chomet eur sizun hag ouzpenn !

E Kamp Plozeved, er bloaz-mañ, e oa kalz a gelennerien hag a studierien. bez e oa ivez tud a bep seurt micherioù. micherioù koulz ha labourerien-douar. Dav eo merka eun dra : tud kêr a seblant beza muioc'h dedennet gant ar c'hamp eget an dud diwar ar maez, moarvat dre ma santont muioc'h an ezomm d'en em voaza ouz eur yez ha n'o deus ket tro da gomz bemdez a-hend-all e-doug ar bloaz.

Kembreiz a zo deuet niverus d'ar c'hamp, evel boaz. Hag evel boaz, graet o deus plijadur an holl gant o c'hanaouennoù dudius. Daou Frizad a dremenas eun nebeut devezioù e-touez ar gamperien. Eur pezh-c'hoari, « Eun den a netra », savet gant Roparz Hemon, a voe c'hoariet.

L. Bothorel.

“EVIT BLEUN-BRUG”

Aux auteurs de cantiques, chansons et de leurs airs, à ceux qui les ont harmonisés, il est demandé d'adresser un exemplaire de chaque composition au docteur Dujardin, Saint-Renan (Finistère), ancien président du Bleun-Brug et fondateur des concours de chorales.

La même demande s'adresse aux harmonisateurs de chansons populaires et de cantiques bretons empruntés au fonds breton.

Ces documents, classés, doivent entrer dans une histoire abrégée « Chansons, cantiques et mélodies de Basse-Bretagne ».

Il va être envisagé de les réunir en recueils pour faire suite à la collection si précieuse des Kanaouennoù ar Bleun-Brug.

Chaque exemplaire doit porter bien distinctement les noms de l'auteur des paroles, de la mélodie, de l'harmonisateur — et ne comporter aucune faute musicale.

Le tout doit être accompagné de l'autorisation des auteurs de publier et de n'exercer aucun recours de droit d'auteur pour le cas où le Bleun-Brug viendrait à éditer un recueil et à faire exécuter les chants dans ses réunions et concours.

Heuilhit hor skol vrezonek dre lizer.

Skrivit da : Ti-Karre, Bleun-Brug, Kastellin.

PEDENN AL LABOURER

*Ton nevez gant an Aotrou Goasdoue,
savet evit Bleun-Brug Kastellin ha bet
kanet eno d'an oferenn-bred.*

Andante



Doue Krou - er an nenv ar mor hag an dou - ar , Ho
kalloud a zo braz , ho made-lez Hep - par .
Lakaat a rit an had da ziwan er par - kou . Di -
wall a rit an eost a garg ar gri - gno - liou .

Doue, Krouer an Neñv, ar mor hag an douar,
Ho kalloud a zo bras, ho madelez hep par.
Lakaat a rit an had da ziwan er parkou,
Diwall a rit an eost a garg ar grignoliou.

C'houi zigas pa garit, ar glao hag ar sec'hor.
Neb a labour hepdoc'h a goll krenn e labour.
Hepdoc'h netra ne gresk endro d'an douarou,
Rak eus ho torn hepken e teu an holl vadou.

Koulskoude, va Doue, evel m'hoc'h eus laret,
Ne zastumimp netra ma ne labouromp ket.
Evit ma vezo mat, war va labour dister,
Skuilhit o va Doue ! ho nerz hag ho sklerder.

Gwilhom.

*An ton eus ar c'hantik-mañ a zo bet kavet ken kaer gant kement a dud, ma
kredomp ober plijadur en eur e lakaat amañ. Bez' e c'hell beza kanet ivez e peder
mouez. Evit e gaout gant peder mouez, n'eus nemet skriva d'eomp.*